

DALC'HOMP D'HOR FEIZ

DISKAN

Da Feiz hon tadou koz, ni Paotred Breiz-Izel,
Ni 'zalc'ho mat ato ;

'Vit Feiz hon tadou koz hag en-dro d'he banniel,
Ni holl en em stardo.

Feiz karet hon tadou, morse ni n'ho nac'ho,
Kentoc'h-ni a varvo! (3 gwech)

D'ar c'hrouadur bihan, e kichenik e gavell,
E lakit eur vamm vat, en deiz evel en noz ;
Er boan hag en anken, buan hi a daol eur zell
War groaz santel Jezuz... he zonzj er baradoz.

D'arpaotr, d'ar plac'h yaouank, c'houi 'ziskouez hent
[ar furnez ;

C'houi 'lavar : « It gantan, hep krena dirak den.
Yaouankiz Breiz-Izel, bezit, epad ho puhez,
Ato gwir gristenien, ha treitourien biken. »

D'an den koz gwen e benn, e korn an tan azezet,
O skuilh daelou a geuz war e amzer genta,
C'houi 'lar : « Bezit dinec'h, er baradoz 'vo kavet
Eürusted peurbadus goude poan ar bed-ma. »

D'an den diwar ar méz, kerkouls ha d'an den a vor,
C'houi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato.
Gouzout e reont en nenv e kavint holl dor zigor ;
Ar vuhez 'vo bet tenn ; d'an drubuilh kenavo ! !

IMPRIMATUR :
Kemper, 27 Gouere 1935
P. JONCOUR, vikel vras

8 N1-4-027

KANTIK D'EN EM OUESTLA

d'ar WERC'HEZ VARI

WAR DON : BONNE MARIE

DISKAN

O Gwerc'hez, me 'ro
D'eoc'h evit ato
Va c'horf, va ene.
D'eoc'h-c'houi me 'ginnig
Va c'hurunennig :
Ra vo, eun de, } 2 wech
Rentet d'in en ne ! }

Hirio, Mamm garet,
Dirag ho tron
'Omp holl diredet
A wir galon.

Deut 'omp da veuli
Ho santelez ;
Deut 'omp da bedi
Ho madelez.

Nag a vertuziou
En hoc'h ene !
Nag a veritou
En ho puhe !

Eus lein an-nenvou,
O Mamm santel,
War hon engou
Taolit eur zell.

Mar beillit warnomp
Evel eur vamm,
Ar vuhez 'renfomp
A vo divlamm.


Grit ma vimp sentus,
Leun a resped,
Vel ho Mab Jezuz
E Nazareth.

Roit ho skoazell
D'am mamm, d'am zad,
Ma vezint fidel
D'am zével mat.

Pedit, 'vit goulen
Digant Doue
D'an holl bec'herien
Grasou neve.

(Tad Bourdoulous)

IMPRIMATUR :
Kemper, 3-10-1911
A. COGNEAU, v. g.



KANTIK AR VUGALE

d'an INTRON VARIA

DISKAN

*Mari, hor Mamm, hor Patronez,
Selaouit ho pugaligou :
Astennit d'eomp gant karantez
Ho torn bepred leun a c'hrasou.*

En hor c'havell hon eus desket
Meuli hoc'h hano dudius ;
En hor c'hâlon ema skrivet
Hanoiou Mari ha Jezuz.

Pa renk gounit e damm bara,
Ar vuhez a zo rust d'ar paour ;
Mes evit e sklerijenna
Ar feiz 'zo eur steredenn aour.

Hor feiz, setu hon holl denzor
Deut d'eomp digand hon tadou koz ;
Setu an alc'houez a zigor
Dirazomp dor ar baradoz.

Ni 'fell d'eomp a-hed hor buez
Diwall hon tenzor talvoudus :
Miret d'hor Mamm hor c'harantez
Ha chom unanet gant Jezuz.

An dud fall a zo kounnaret
Ouz Doue hag e lezennou :
C'hoant o deus 'vefe diframmet
Ar feiz koz eus hor c'hâlonou.

Ar brezel a zo diskleriet
Da ene ho pugale baour,
Mamm zantel, n'hon dilezit ket ;
En deiz, en noz deut d'hor sikour.

Torrit galloud an drouk-spered
Ha dindan plegou ho mantell,
Intron Varia benniget,
Kuzit bugale Breiz-Izel.

WAR-ZAO, KROAZIDI BREIZ !

DISKAN

*War-zao, Kroazidi vat Breiz-Izel,
Da heul hor Mestr, war-raok bepred !
Dre-holl, embannomp an Avel,
Ma reno Jezuz war ar bed !*

War-zao ! war-zao ! vit Feiz hon Tadou !
Ar Mestr a c'halv tud a youl vat ;
Deomp war e roudou a strolladou,
Paotred ha merc'hed a bep stad.

Kroazour, war-zao ! Ma reno Jezuz
En holl galonou, deiz a noz,
Ma savo tud ato niverus
Da brezeg feiz hon Tadou koz.

Kroazour, war zao ! Evit an Iliz,
Evit ar Pab, war-raok bepred !
En ofer'nn, bemdez, e sakrifiz
En em ginnig evit ar bed.

Kroazour, war zao ! Dalc'hmat aketus
D'ar bedenn, d'ar piniennou,
Kennerzet bemdez ouz taol Jezuz,
Gand evez heuilh e lezennou.

War-zao ! war-zao ! O Kroazour divlamm,
Kalonek dougenn sonn da Groaz ;
Da zorn e dorn ar Werc'hez dinamm,
Te 'heuilho Jezuz skoaz ha skoaz.

Kroazour, war-zao ! A enep Satan
Hag e vevelien dizakret,
Evit diframma diouz e graban
Paourkêz eneo peur-zallet.

Kroazour, war-zao ! Beteg ar maro,
E kreiz ar stourmad chom divrall ;
Mar kouezez, raktal te a zavo,
Ha e po digoll er bed all.

IMPRIMATUR : 26-11-1934

P. JONCOUR, vikel vras.